

## NOELEN



## I.

Peh trouz zo ar en douar, peh can e glevan me  
 Caërrret or melodi e zo e lein en enw  
 Ælet lavaret d'imb perac e cannet  
 Peh neventi enta e zo erru er bed

---

## II.

Cannet ive guenoumb, cannet bobl doc'h en douar,  
 E tamb de laret doc'h un neventi hemb par;  
 Or mabik beniguet. roue Jerusalem  
 E zo gannet vit oc'h er ger a Vetléem

---

## III.

Erru é en termen doc'h ar profecieu  
 O noz mil guec'h eürus e dor hon chadenneu  
 Cannet gloar hag enor da Jésus ha Mari  
 Deit é Doue de vout dén; erru é er Messi

---

## IV.

Ar er poent a greiz noz é ma gannet henoaz  
 En or c'hoz craou distro é braz tristidigeaz  
 Hui en cavo ennon etré daou aneval  
 Wit tomet hi vempreu n'en nes meit ho anal

---

## V.

Ennon e ueliet er mestr doh ol er bed  
 Ar un dornadik plouz. en un ew astennet  
 Ion e za de vout paour evit ho pinvikat  
 Ha distak ho kalon doc'h ar bed evit mad

---

VI.

Or marchossi disto e zo pales ho Toue  
Ennon e cahuiet or predeger néhue  
Un éw é er gador e nes Jesus ehoazet  
Wit predek doc'h ennon er binijen d'er bed

---

VII.

Damb gant er vugulien, redamb ol tresek hon  
Tostamb d'en adori ha da ziskon gat hon  
Peh stad e gleamb ni ober doc'h hon iné  
P'en dés wit hi sovo diskennet doc'h en enw

---

VIII.

Daoulagad me Jésus e ziver a zaëleu  
Gouelo e ra déjà a gauz d'hon pehejeu  
Ne scuill c'hoaz meit daeleu, queut pél e houïefèt  
E scullo evit ouble a boullad ol hi ouèd.

---

IX.

Hi zornigeu tener n'imb voulj ha n'himb asten;  
Yon glask m'emb brehetat; me c'halon e c'houlén  
O Jésus; o mem breur; wit ol ho poenieu  
Ne c'houlennet enta neméit hon caloneu

---

X.

Zel c'hoaz hi dreidégeu e clasquout n'imb zispleg;  
Evit ho pehejeu e c'heseñant redek  
Perak e zirak hon e clasquet hui pellat  
N'im dol en hi zivrec'h; ion é er bugul mad

---

XI.

Tosteit ol tud pinvik, zonet gant ho madeu  
Ar gével hon Jésus n'en nes meit coz lieneu  
Penz e c'hellet hui bout zod gant ho tauvé  
Tre me ma ho Toue er vrasah paourante

---

XII.

Tud paour hag affliget, considéret ho Toue,  
Ha ne gomzet quet quin enep d'ho paourante;  
Ne-vern pe gen paour oc'h n'en oc'h quet zur paouro'ch  
Wit an Doue doc'h en enw deñ de vout den wit oc'h

---

XIII.

Er lapousset bihen e nes un neziad  
Hag er lonnet toulleu wit lakat ho hovad;  
Mæs Jêsus mæstr en ol, p'en é wit oumb gannet  
Ewit c'harpo hi hén ne gavo leh e bet

---

XIV.

Me huel er marchossi hi vempregu tenér  
Hemb tan hag hemb dillad esposet d'an amzer  
Jesus e soufrr wit onmb ar poenieu brassan  
Hâ ni donjo a ramh er binijen scanwan

---

XV.

Tosteïd tud gloriüs, tud a galon ihuel  
Deñt amen de gemer gant Jêsus or gentel  
Penos e credet hui n'imb zével quen ihuel  
A pe uelet ho Toue e tisken quen izel

---

XVI.

Tud zodet gant ar bed ha gant er fauss joéyeu  
Tosteït dedal Jêsus, ha zellet hi zaëleu  
Hui ne glasket bemde meit n'imb zivertisso  
Tre me ma ho Toue a gaus d'oc'h e ouelo.

---

XVII.

Er c'hreu a Vetléem e vo test enep doc'h  
Mar ne fot doc'h condui or vuhe santeloc'h  
Er c'hroadur tener-me e vo un de guelet  
E tisken leun a c'hloar wit jujo ol er béd

---

XVIII.

Esseyamb a vromen ober hon peuc'h gant hon  
Ha presantamb brepet or galon pur dohon  
Rac or galon duet gant vilim er péchet  
E zo mil guec'h loussoc'h evit creu er lonned.

XIX.

Peguen eürus oc'h hui, ó Guerc'hies beniguet  
Hui zo mam d'ho crouer hemb collo ho kuerted  
Goulonnet ma buêfê wit plijout da zoue  
Gant lod doc'h ho purted, lod doc'h ho carante

XX.

Ha c'hui Jozeph, dén just ha fidel d'ho téver  
Choajet oc'h bet wit goarn ha mago hon Salver  
Gouleunet ewit ouble er c'hraz kaër d'en goarno  
E creïs hon caloneu, hemb james er c'hollo

XXI.

O Jésus. me Salver, ô croadur beniguet,  
Bezit meulet noz dé er pèr c'horn doc'h er béd  
Reït d'imb quent ho quitted, ho penediesion  
Ha bezit wit james er mestr war hon kalon.

